

## 14 - PERINA KOAD

## Perrine Koad

Mar ' plij ganeoc'h e selaoufet  
 Ur son 'zo nevez kompozet  
 Deus ganit eta  
 Ma aformp hon daou d'ober an dra

D'ur plac'hig yaouank hi 'zo graet  
 Perina Koad ec'h eo anvet

Perina Koad sur a ouele  
 Ne gave den n'he c'hoñsolje

Ne gave den he c'hoñsolje  
 Nemet Terseg, hennezh a rae

Tavit, Perin, na ouelit ket  
 Me 'raio ho timezifi pa garfet

Perina Koad, eus a Vulien  
 Sklaeroc'h evit dour en ur werennn

Un hinkin glas war he barlenn  
 Ur merinos en he c'herc'henn

Ur c'harkan aour en dro d'he goùg  
 Ha gant Terseg int paeet tout

Pa 'z a Perrin en toulloù kloz  
 Vez Terseg o sachañ war he brozh

Vez Terseg o sachañ war he brozh  
 Perrin, poent eo mont da repoz

Eus an Tour d'Auvergne e vez gwelet  
 O vont gantañ d'e gambra da gousket

*S'il vous plaît vous écouterez  
 Une chanson nouvellement composée  
 Viens donc avec moi  
 Que nous allons tous deux faire quelque chose*

*Elle a été fait sur une jeune fille  
 Qui s'appelle Perrine Coat*

*Perrine Coat pleurait  
 Ne trouvait personne pour la consoler*

*Ne trouvait personne pour la consoler  
 Que Tersec, celui-là le faisait*

*Taisez-vous, Perrine, ne pleurez pas  
 Je vous marierai quand vous voudrez*

*Perrine Coat de Buhulien  
 Plus claire que l'eau d'un verre*

*Un fuseau bleu sur son giron  
 Un châle de laine sur les épaules*

*Un collier d'or autour du cou  
 Et tout cela a été payé par Tersec*

*Quand Perrine va dans des coins sombres  
 Tersec lui tire sur la jupe*

*Tersec lui tire sur la jupe  
 Perrine, il est temps d'aller se reposer*

*De la Tour d'Auvergne on la voit  
 Aller se coucher avec lui dans sa chambre*

Ha ma vez huchet war Derseg  
Te ech' eo sur ur c'hog a merc'hed

Tavit, Perin, na ouelit ket  
Me hoc'h eureujo, pa garfet

Setu int dimezet hag eureudet  
Hag aet 'n ur gwelc'h da gousket

*De sorte que l'on crie à Tersec  
C'est sûrement toi le coq des filles*

*Taisez-vous, Perrine, ne pleurez pas  
Je vous épouserai quand vous voudrez*

*Les voilà mariés et épousés  
Et couchés dans un lit*

Cette chanson a été collectée par François-Marie Luzel auprès de Anna Trutot de Pédervec et publiée en 1890 dans « Soniou Breiz-Izel » tome I, p. 194. La mélodie est une composition de Ifig Castel.

## 15 - RENE LAMBAL

### René Lambal

Rene Lambal goude e goan  
Kas e gezeg da Brad Bihan  
Coline colaine ale Balaine  
Dingue ding Colin mon ami

Na pa oa o kas e gezeg  
E vestrez koant en deus rañkontret

N'eo ket ho kezeg a glasket  
Welloc'h eo deoc'h kavout merc'hed

N'eo ket ho kezeg eo ret klask  
Welloc'h eo deoc'h kavout ur plac'h

Na oa ket he ger peurachuët  
Rene enni a-vriad en deus kroget

Na-a Rene diskrog diouzhin  
Pe me grio war dud an ti

*René Lambal après le dîner  
Mène ses chevaux à Prad Bihan*

*Quand il menait ses chevaux  
Il a rencontré sa jolie maîtresse*

*Ce n'est pas vos chevaux que vous cherchez  
Vous aimeriez mieux trouver des filles*

*Ce n'est pas vos chevaux que vous devez chercher  
Vous aimeriez mieux trouver une fille*

*Elle n'avait pas fini de parler  
Que René l'a attrapée a-brassées*

*René, lâchez-moi  
Ou j'appelle les gens de la maison*